



CHANSON NEVEZ,

VAR SUJET DAOU ZEN YAOUANC

PERE EN EM GARIE GANT FIDELITE.

Var un ton nevez.

ABailard, Horaç, Tibul, Catul, Ovid, Orphe;
C'houi, modelou sincer deus ar güir amitié,
Laqit oll em guenou ho preposiou charmant,
Inspirat em speret va c'halon languissant.

Me ya da zisclérya va buez maleurus :
Tostait d'e c'hlévet, tud yaouanc curius ;
Deut oll da bartaji va glac'har, va c'hlémou,
Ha formit ganén-me ur feuntun a zaelou.

En escopti Treguer e voa ur plac'h charmant ;
Hac e doa ravisset calon meur a zen yaouanc :
Demeus an oll merc'het a meus darempredet,
Hy eo dre breferañ dreist oll a meus caret.

Mes he sellou qen douç, hac he c'homzou deread,
He furnes, hē douçder, hac e bolontez vad
Alumas em c'halon flammou an amourouset ;
Bep instant va speret voa ganti occupet.

Var sovennou yaouanc, gant beg ur ganivet,
Tro-var-dro hon hano lies am eus scrifet.
C'houi, plantennou eürus, a gresco nos ha de ;
Ni garfe eveldoc'h e cresqfe hon amitié.

Ne meus mui a blijadur nemet arru e ve

49. 4 19. 192



An deiz d'allouñ gñelet objet va c'harantez :
Eppàn ma residiñc dezir va fantazi,
A guement zo'r bed-màn ne garàn nemet-hi.

Mes, allas! torret eo chaden ar blijadur ;
Troet va flañeden en flemmou dinatur :
Brémàn a dra certen vezo rét e c'huitât !
Mancout ra va c'halon, sclerder d'am daonlagad.

Doùe oll-huissant ! roit din asistanc ,
Vit m'allin d'am mestres mont d'annonc ar setanc :
Me a ya c'hoas ur vech hête ty va mestres,
Gant ur galon carguet, leun a dristidiguez.

Cetu me vis-a-vis d'am güir muya-carez,
Princes an amitié, model an oll merc'het,
Va oll goñtatamant, oll joa deus va speret,
Hi a garg va c'halon bep heur ha bep momet.

Neus netra endro din na repet d'am memor ;
An amitié fidel a zo dreist pep sort tenzor ;
Mes bréma e redoubt oll glac'har va speret ;
N'allàn qet comz outi, qement e zòn mantret.

Abondanc va d'ac'h a deu d'am daoulagad ;
Carguet eo va c'halon demeus a huanad,
Petra zo, a mignion, ma zoc'h qen desolet ?
Deus hoc'h affliction contit din ar sujet.

Qeuz meus a greiz calon o velet ho tourmant ;
Me garfe ve'm pouvoâr rêi déc'h soulajamant.
D'am anoi, d'am glac'har c'houi a zo calz qiriec ;
Abars varc'hoas vintin me a vo partiet.

Possubl ve, va Doue, e ve güir qementse,
E vec'h-u deut amàn vit qemer ho conge !
N'en deo nometre vouir, partia a vo ret :
Arru eo va c'herent de bronone va arret.

Arca, va serc'her, e zit-tâ d'am c'huitât ?
Penaus a rin brémàn ? Heumàn zo calonad !

Va oll santimanchou zo ganec'h goneret ;
 Me a vo maleurus , ma vemp dispartiet.

Arrétit ho taélou , n'em em desolit get ;
 Bars ur mis d'ar pella , me zeui c'hoas d'o , quélet.
 Qemerit confianç ha chomit en ho , peoc'h ;
 C'houi eò va oll esperanç : ne garan nemedoc'h.

Allas ! va zervicher , n'en deo get hep rêson
 E velit ho mestres e qer bras affliction :
 P'o po chenchet a vro , c'houi chenchet a lezen ;
 Ur vestres all o po , c'houi'm dilezo a grenn.

Ha pa ve laquet-entrezomp-ni hon daou
 Qement demeus a hent vel zo ac'hian d'an evou ;
 Credit en assuranc , biqen n'ho tilezàn :
 Biqen mestres n'ain ho met an hini brémàn.

Birviqen n'ancouezàn ar pez a zo touet,
 C'houi c'heus sonch va mestres , a voeliou Nedelee ?
 Em boa aon em tilesjoc'h en deiz voa e tonet
 An hini na zezire nemet beza ho pried.

Ha neuze , va mestrez , evit va c'honsoli ,
 Gant un ar qen constant e teujoc'h da bropos
 Monet d'an ilis vras , eno dirac Doue ;
 Da brononç ar sermant deus ar fidelite.

Etre peder ha pemp heur , ar meurs dahardae ,
 En em rentjomp en ilis an eil gant eguile.
 Ha pa voamp , daoulinet vis-a-vis d'an auter ,
 E leqejoc'h ho torn en hini ho servicher.

Gant ur galon sincer , e faç ar Sacramant ,
 E teujomp-ni hon daou da brononç ar sermant
 D'en em garout fidel bete fin her bue ,
 Biqen nemet ar maro sur n'hon dispartige.

Ha p'am be da veva tenlies a vlaves
 Evel zo a zalig ebats en ur forest ;
 Birviqen n'ancouàn va doussic Jan-Yvon ,

Plijadur va speret, rouanes va c'halon.

Deus a greis va ene me offr déc'h, va mestres,
Sacrific va speret ha va goad assambles :

Mar trahissàn bigen va oll bromessaou,
Doue d'am punisso a bep seurt maleuriou.

Qemerit, va mestres, vit merq a bromesse
Diou galon peur-treujet gant ar memes cleze :

Var ar memes imach e cavot dessinet.

Diou durzunel yaouanc en em garie parfet.

Ho comzou, va mignon, a zoulach va c'halon ;

Na ellàn qet credi em lesfac'h en abandon :

Assurit din-me c'hoas, var ho qer a henor,

Bigen na drahissot ur galon deoc'h digor.

Finissomp, va mignon, tost eo d'an anter-nos,

Arru eo an amzer, poent é deomp repos.

Adieu, va mestrez qer, qen a vo ar c'hentàn ;

Ha déc'h, va servicher, mes retornit buan.

Aben pemzec de goude e retornis d'e gullet

Gant calz demeus a joa, na zanten qet qerzet ;

N'en qet buan avoalc'h, herves m'am boa c'hoant,

Me zante e lampe va c'halon triumphant.

Pa voan aru er plaç en decir va bolonte,

E qichen va mestrez evit clêvet he doare,

P'e c'honsideris ervat e chommis estonet,

O tonet da gompren penaus é voa chenchet.

Evit parlant dezi, hi na responte qet :

Ur flêm sco em c'halon pe guelis qer mantret.

An douar arozet gant daëlou he daoulagad

A voa un test assuret demeus he c'halonad.

Ah! m'am c'herit-u c'hoas gant guir fidelite,

Disclêryit entrezomp bremàn ar virione ;

Larit din ar sujet deus ho melanconi :

Güell eo gauén meryel eguet réi déc'h anv.

Allas! va zervicher, ni a vo separet :
 Da zemezi d'un all me a zo contraignet;
 Henvoas zo lavaret e vigen goulennet :
 Se a zo qiriec din ma zòn qen glac'haret.

C'houi, Mari, va mestrez, am lez en abandon;
 Goude ho peza laqet rouanes em c'halon!

Honnes eo ar recompanç e meus-me meritet
 Goude beza ho caret re dreist an oll merc'het.

Me ho ped, va mignon, na reprochit qet din
 E ve va dessin breman dont doc'h abandoni.
 Possubl ve'm accusfac'h a infidelite!
 Ne meus discuezet dec'h nemet re garante.

Gout ouzoc'h coulz ha me pegnement ho caran;
 C'houi zo caus d'am zourmant pini a anduran;
 Va oll garante voa gonezet oll ganec'h;
 Va brassa plijadur voa oboissa dec'h.

Bepret on n'em rentet gant guir fidelite
 Bars an ancret fixet herves ho polonte.
 M'am bige eveldoc'h nebeutoc'h carante,
 M'em bige ho quittet hep nep dificulte.

Me garje na vijemp bigen en em velet,
 Pa zeo ret demp hon daou beza dispartiet :
 Ma vije arru ar poent da veza demezet,
 Credit penaus bigen d'am zad n'am bige pleguet.

Goude ar plijadur teu an desolation :
 N'oufac'h mui eguedon caout seurt affliction
 Eguet d'am separi deus desir va c'halon;
 C'houi voa va zervicher, va oll gonsolation.

Ebars em flaneden o pebes chenchamant!
 Homàn zo evidon ur voalen a dourmant!
 Va amzer dremenet am chagrin, va mestrez,
 Pa deu din da gompren bars em flijadures.

Sonch oc'h eus a vis ebrel, ar zul goude creiz-de

E rojoc'h din ar gach demeus hoc'h amitié :
Nan, biscoas va speret ne voa bet qen joaus ;
Hanval voa hou bonheur d'ar sperejou eürus.

Mes bremàn é mantret gant an oll dourmanchon.
Me grede parfet mad e vijemp priejou :
Un esperanç qen douç a rejouisse va c'halon ;
Me zonje na vije biqen separation.

Mes achu é va bonheur hac achu vit biqen ;
N'en em zissipo qet evel ma ra ra'r glizen ,
A zisparis en ar pa deu an eol da zeyel ,
Pe vel un dornat pell güintet gant an avel.

Petra a zervich din beza laqet er bed-màn ?
Bea da zouffr evidoc'h, ô va mestres ! bremàn ,
Qen hir ha va buez e pado va glac'har.
Me garre beza bremàn e calon an douar !

Adieu a laràn dec'h qent eguet partia ;
Me a barlant ouzoc'h vit ar vech diveza :
Biqen bars er vro-màn n'ho quclàn, va mestres ;
Bet eürussoc'h eguedon Adieu evit james.

M'ho ped, va zervicher, ouzin na fachit qet :
Pa golfen va buez, me noc'h ancounain qet.
Birviqen n'ho quclin hep monet d'bo betec ;
Gant calz a gonfianç deut bepret d'am guclet.

Bet persuadet mad ho po consolation :
C'houi é am eus choaset vit pried d'am c'halon.
Credit en assuranc biqen n'o tilezàn ;
James mestrez n'am ho met an hini bremàn.

Ar silanç, ar glac'har ras fin d'hor preposiou,
Hor mouez a voa mouguet gant an huanadou ;
Demeus va daoulagad e redé an daclou
Vel ar voastou o tiruill demeus ar montagnou.

N'ouffac'h biqen soujal qer bras desolation !
Me sonje voa plantet ur c'heze em c'halon ;

Larguet a zizesper, na c'houlen nemet ar c'haoc
ar maro ar prompta, an termen va disgraç.

Me voa bet pemzec dez, ia, ha pemzec nos
lep ma ellis biscoas qeiner en tout repos :
'a vijen em goele en dessin da gousqet,
gant ar spont hac ar form e vijen difunet.

Bepret ar memes uvre a deue incontinant
da represanti din an objet eus va zourmant.
En etat m'e gijelis, pa bartijomp hon daou,
ar flem, an diszesper bars en hor c'halonou.

Lies e receven deus e c'hélou goude,
Dre voyen lizeriou carguet a garante,
Pere am c'honsole epad va hir absanç,
Dont da jouissa deus joa an esperanç.

Cetu deja nao mis na meus gouelet va mestres;
Arro eo ganén lizer digant he c'honsortes.

D pebeus qélou trist zo ebars anouçet!
A dall al ligneu guenta e meus-en remerqet.

O planeden barbar, leun a yelanconi,
Ne scuiset-u qet c'hoas dus va fersecuti!
Pet guech e varvin-me qent mervel en effet?
E prouvi ho coler, ô petra meus-me grêt!

Den ingrat ha perfid, cald ha dinatur,
Maro eo da vestres bars en displijadur!
N'ellis pelloc'h poursu ar c'hélou desolant,
Coll a ris ar güelet, an nerz, ar santimant.

Ne meus mui a c'hallout nemet evit gouela;
Echu ê va oll joayou, allas! bars er bed-mâ :
Ne meus evit partach da choin var an douar
Nemet hirvoud, tourmant, mielconi ha glac'har.

O Roue an ênvou, mestr an Ælez eürus,
Noc'h eus qet va c'hrouet vit beza maleürus.
Diqennit bete din sell lagad a druez,

Pe laqit prontamant un termen d'am buez.

Ar spaç a drizec mis ouï bet ous he c'henti ,

Ne voan em plijadur nemet pa vijen ganti :

Hi a voa an objet eus va ambition ;

Qen ne allan cavet nemet affliction.

C'hoas e viran em pres he lizer diveza

A scrifas hi din-me qent quittat ar bed-mâ ;

Ha pa ven va-unan lies en digorân :

Pa gommançan d'e lenn , gant daëlou e glebian.

Gouëlomp oll, tud yaouanc, gouëlomp oll assambles!

Biscoas plac'h na zeus bet fideloc'h eguet honnes :

Birvigen na zortio certen deus va speret ;

Bete lin va buez me e c'haro bepret.

Canit-u, rossignol, gant ho mouez triomphant,

Disquëzit d'ar c'hoajou hano va mestres coant ;

D'ar mintin, pa bignit etrezec an êuvo,

Vigilant ha fidel, repetit he hano.

Trist e qichen he bez e lacân ve c'harante ;

Ennân e repos bremân objet ya amitié.

Doue vit recompanç deus he c'harante fidel,

En deus accordet dei ar joayou eternel.

Ha pa deuyo an ancou gant e faç horrerus

Da lacat un termen d'am buez maleürus,

Deus ar memes moment ma vo va goad o repos

Me jouisso ganti eus joa ar barados.

FIN.



E. Montroulez, eus a Impfimeri LÉDAN.